

n. 5.

CANTIC
VAR
BUEZ SANTES ANASTAS



QUIMPER
Typographie Ar. de Kerangal.
1879.



CANTIC

VAR

BUEZ SANTES ANASTAS

Pobl a Vreiz-Izel, me ho ped,
Didostait ama da glevet
Ar miraclou a reer bemdez
E kichen ar Feunteun-Nevez.

Var douar Lambol-Bodenes
Ema feunteun sacr ar zantes ;
Pell amzer zo eo dilezet
Ha gant an oll ancounac'heet.

Mes Doue a verk d'eomp ar poent
Da rei gloar hag honor d'ar zent,
Hag a laka ar feunteun-ze
D'ober miraclou adarre.

O Speret-Santel, me ho ped,
Diskennit brema em speret,
Evit va zicour da scriva
Ar burzudou a reer ama.

Santes Anastas, merzerez,
A beder er Feunteun-Nevez.
Pedit-hi a greiz ho calon :
Vad a rai d'eoc'h e peb feson.

Brema ez euz eun tri e'hant vloaz,
E reat ama miraclou braz ;
Mes neuze e oue ordrenet
Ma vije ar feunteun stanket.

Ar feunteun prest a oue stanket,
Mes goulscoude ne e'helljot ket
Coll ar zoursenn, a ioa crenv braz,
Hag a red hirio 'vel biscoaz.

Mes abarz sonjal niveri
Ar burzudou zo great enni,
Guelomp eun darn euz a vuez
Anastas geaz, ar verzerez.

Euz a Goat-Meur oa ginidic,
A lignez nobl ha pinvidic ;
Mes an histor ne lavar ket
E pe amzer eo bet ganet.

Deut ma oue d'an oad a rezoun,
E oue douget d'an orezoun
Gant he mamm vad, santes Bider,
Eun itroun vraz euz ar c'harter.

Ho diou eta en em dennent
En eur vengleuz, e corn an hent,
Da bedi, eharz ar c'hoat,
Ar Verc'hez Vari hag he Mab.

Pa oue achu he femzec vloaz,
He zad ractal a lavaras
He rei da eur c'hount da bried,
Hag hen ar c'hount Arthur hanvet.

Hogen, hi e devoa goestlet
D'he Zalver Jesus he guerc'hdet,
Hag ar c'helou-ze pa glevas,
He goestl kerkent a nevezas.

Ar c'hount Arthur, prestic goude,
Euz he gastell a ziblase,
A ziblase gant eun hast braz
Da zont da velet Anastas.

Ar c'hount Arthur a c'houlenne
E ti 'r zantes pa ziskenne :
« Peleac'h eta 'ma 'n dimezell ? »
Mes n'edo ket 'barz er c'hastell.

Casset a oue neuze timat
Servicherien a berz he zad
Evit he c'hask da zimezi ;
Mes den ne gave anezhi.

Nemet he mamm ne c'houie den
Peleac'h edo gant he fedenn.
He mamm eta a redas prout
D'he c'hask da zont da gaout ar c'hount.

Gant he mamm vad, santes Bider,
Anastas a zistro d'ar gêr,
Ha pa erru e tal an or,
Ar c'hount he receo gant henor.

Hi her salud gant peb respet,
Mes heb lavaret ger ebet ;
Trist er c'hastell ec'h antreas :
Ar c'hount Arthur he remerkas.

He zad neuze, gant eun trein braz,
Euz he gastell a ziblasas
Evit cass kelou hed a hed
A zolanite an eured.

Tud ar c'hount Arthur da Goat-Meur
A deu ive abarz nemeur,
Ha pa zigouezont er c'hastell,
E c'houlennont an dimezell.

Goude e reont ho reverans
D'an assamble euz an noblans.
An oll er zal a ioa laouen,
Mes Anastas e doa anken.

He zad en devoa pourchasset
Peb tra dija 'vit ar banket ;
Mes hi en he za a zavas,
Ha d'he zad grons a lavaras :

« Va zad, me am euz eur pried
« Ha n'her chenchinn oc'h goaz ebet ;
« Ar c'haera euz ar priedou,
« Jesus, va Mestr ha va Aotrou.

« Hen eo en deveuz va frenet,
« D'am zavetei he c'hoad scuillet ;
« He bedi a ran deiz ha noz
« D'am receo en he varadoz.

« N'ez euz na baron, na markiz,
« Hag a raffe d'inn chenc diviz ;
« Eur vez e ve d'inn, va zad ker,
« Caret eur c'hount dreist va Zalver. »

He zad kerkent, eat en egar,
A ordrenas gant he gounnar
Lakaat he vere'h en eun dourell
A ioa e goeled ar c'hastell.

Eno n'e doa evit beva
Nemet dour hag eun nebeut fa ;
Mes hi, en eur bedi Doue,
A ioa ato joaiuz ha gae.

He zad a gassas d'he guelet
Eur zorcerez fall, milliget ;
Houma, dre gomzou ar floura,
A glask an tu d'he zouella.

Mes Doue leun a drugarez,
A douch caloun ar zorcerez,
Ha gant guir glac'har d'he fec'het
E ra d'ezhi gouela bepret.

Daoulinet dirac Anastas,
E ped anezhi gant feiz vraz
Da obten pardoun evithi :
« C'hui vo selaouet, » emezhi.

Ar zantes humbl a respountas :
« Doue ho recevo 'n he c'hras ;
« Mes red e d'eoc'h mont ac'halenn
« Da ober eur guir binijenn. »

Hi en he za trumm a zavas,
Hag, en hent, kenta a gavas
A oue ar c'hount o chasseal,
Hag hen varzu ennhi ractal.

Mes hi, heb rei d'ezhan amzer
Da lavaret zoken eur ger :

« Red eo, emezhi, heb dale,
« Lakaat ho merc'h e liberte.

« Hounnez eo ar feson guella,

« Hag ar feson an assura

« Da ober d'ezhi assanti

« D'ar c'hoant oc'h euz d'he dimezi. »

Ar c'hount a zistro d'he vaner,
Ha d'he bried, santes Bider,
Ec'h hast affo rei an alc'houez
Da zigeri var ar brinsez.

Epad m'edo e liberte,

E veze noz-deiz o vale,

O velet an dud ankeniet,

Taget gant a bep seurt clenvet.

Ar c'hount Arthur, en amzer-ze,
D'he zad ato a lavare
E raje d'ezhan brezel braz
Ma n'en devije Anastas.

Setu hi lakeat a nevez
En eun toull tenval, ar gezez,
Ha roet d'ezhi eur mis amzer
D'ober he zonz da rei he ger.

Mes he mamm a gavas cousket
Ar c'hount a Goat-Meur, he fried,
Hag a laeras sioul an alc'houez
Da leusker er meaz ar zantes.

Anastas, heb en em guzet,
Er vengleuz a veze bepret,
Rac brassa dudi he c'haloun
A oa beza en orezoun.

Pa oue fin ar mis erruet,
Ar c'hount Arthur a zav d'ar red
Eun arme hag a ioa crenv braz
Evit caout dre nerz Anastas.

Da genta, ez a d'ar c'hastell
Da ziscleria d'he zad brezel ;
Rac ma renke caout anezhi
Mad pe zrouc e vije ganthi.

He zad, nec'het ha leun a spount ;
A redas d'he c'hask prest ha prout ;
Mes ne gav nemet he roudou ;
An toull tenval a ioa goullou.

Kement a zrouc a ioa ennan
Ma savas neuze c'hoant ganthan
Da laza he verc'h Anastas
Mar he c'havche e plas pe blas.

He c'haout a reas var he daoulin
Oc'h adori he Mestr divin,
Hag, evel eur bleiz counnaret,
Ractal en deuz he dibennet.

He goad pur a redas kerkent
En eur feunteun var bord an hent,
Hag an dour, e leac'h tenvalaat,
A deu dre vurzud da scleraat.

He mamm, ar c'helou pa glevas,
En eur vouela a ziredas
Da gichen he merc'h dibennet
A ioa dija he c'horf scornet.

Kemenn a reas introunezet
Evit ma vije lienet ;
Mes, da genta, 'barz er c'hastell
E oue casset an dimezell.

Arthur, ar c'helou pa glevas,
D'an douar maro a gouezas ;
He gorf, casset da di he dad,
A jom e castell ar Penhoat.

A ben peder heur var 'n ugent
Tad ar zantes a ieas en hent ;
Mont a eure da bell bro,
Ha morse mui ne deuas en dro.

Setu ar fin euruz meurbet
Euz a Anastas benniget ;
Mes ar miraclou e deuz gret
A zo en tu all d'am speret.

Tud mud, tud dall, tud mac'hagnet,
Tud collet gantho ar c'herzet,
Tud seizet-oll ha tud bouzar,
A zo brema var an douar,

Mar oc'h euz iec'hed adarre,
Peleac'h oc'h-hu bet great pare ?
Ha n'e ket ar Feunteun-Nevez
Eo ho kuir madoberourez ?

Ha c'houi ive pardounerien,
Zo dija en ho pesiou ien,
Deut d'ho tro da rei testeni
D'ar grasou oc'h euz bet ennhi.

Savit er meaz euz ho pesiou
Da ober mez d'ar goall deodou,
O deuz anezhi drouc-comzet,
Gounezet gant an drouc-speret.

Enebourien int da Zoue,
D'ar zent, he vignounet, ive ;
Mes eun deiz e vouelint c'houero
Pa vezo divezad d'ezho.

List da gomz an nep a garo,
Ha da incanti dre ar vro :
« Ne reer ket a viraclou braz
« E kenver feunteun Anastas. »

Deut ato, deut, tud ankeniet,
Deut d'ar feunteun gant peb respet ;
Deut di gant guir devosion
Hag e recevot ar pardon.

Santes Anastas, var ho ker,
Plijet gant Jesus, hor Zalver,
Selaou ato hor pedennou
Evit ma'z aimp oll d'an envou !

Imprimatur nihil obstat :

Corisop., 12 Mart. 1879.

JÉGOU, Vic. Gén.

Quimper, typ. de Kerangal.

